

MA FERROKET

Kinniget d'an Otro Uro, person an Treou.

Ar c'hag a zom'iz d'ar bu. rouz ar c'hodur - ha zo di-
d'rouz Di. d'aruz ha sicut'el rum i. ly. War an dou. ar e kous ar gliz.

Jako zo eur pezh kaer a-dailh,
Hag en e garg ac'h ê eur mailh :
Gand kant skoed na gafec'h porjer
Da c'houzout gwelloc'h e vicher.

Ar gwers-butun, ar c'homzo flour,
Na ouffent gonid hon gedour ;
Deus vo gouigour 'n ho kilhorou,
E raio ho kourc'hemenou.

— « Patent corda et ostia !
Hastomp, otro ! Ha, ha, ha, ha ! » —
Chetu eur c'henvreur, eur mignon,
Pebez doare vad d'am c'halon !

— « Bonjour ! ho ! ho ! mont mad reomp ? » —
Kuzuilher pe ver !... Diskennomp !
Na dere ket ober gortoz
Ar penno braz deus ar barroz !

— « Hi, hi, hi, Mòsieu n'est pas là? » —
Da botred ar gwinn lar ken bra,
Ma son al listri er gegin
Gand ar vatez goz o c'hoarzin.

Mes mar gwapa an dud lorc'hek,
Ouz ar bèvien eo karantek :
— « Hu, hu, tosta't, paourkez Doue ! » —
Ma kredfec'h an eus eun ine !

Eur wech hepken 'neus ho klêvet ?
Na c'houito d'ho teurves kammed,
Ha rok vefet arri en ti,
Vo dizolo an neventi.

Mar na zent ki ha kaz outan,
Ha na reont chibout d'ean,
Kement rei c'hoari war o lerc'h
Ma vefont pilet 'vel kazerc'h.

Neuzio all, ragach, ardo drouk,
A denn hon c'hanfart deus e c'houk,
Ha hurr vefe an abaden,
Ma tibunfe d'ec'h e guden.

'Chanta ! ha breman c'houi asant,
'Neus Jako 'leiz e blu skiant ?
Gand kant skoed na gafec'h porzer
Da c'houzout gwelloc'h e vicher !

Gab LISKILDY.

